
CHANSON

AN TRIVAC'H PLANEDEN.

Var ton Cloarec Pempoul.

M'AM be eun-tam amzer, pluen, liou ha paper,
Sqient evit merca, var ben nebeut amzer
Me rafe eur reglen var goal blaneden
Demeus ar c'haëra fleur en em denn da drezen.

Qent avanç davantach e teuàn da c'houlenn
Sclêrijen ha graçou an trivac'h planeden,
Pere a c'houarn tout oll izili an den,
Eus a guement a ra hac a ell da gompren.

Artez eo ar guenta eus ar blanedennou,
Outi dre breferanç e c'houlennàn graçou;
Rac hepcaout he graçou ne oufet qet compren,
Pa zeo hi a c'houarn ar speret hac ar penn.

Pa deu din da sòñjal en amzer dremenet,
Ha laqat va memor en hini da zonet,
Va c'halon a lar din, mantret gant ar glac'har,
Birviquen va repos n'em bo var an douar.

-Bremàn me zisclêryo ebars en abreje
Va flaneden galet tremenet em bue,
Evit an effejou sur na recitin qet;
Va c'halon, pa zòñjàn, a zo cazi rannet.

Abaoue ar moment ma zê bêt unisset
Va ene gant va c'horf, e voa predestinet

Gant Doue pen-da-ben ar suit va flaneden
Va brassa plijadur a raje din angen.

Aboe m'òn er bed-màn, me a ell lavaret
Qement seurt plijadur zo ganén êrnet,
A zo bet mizerabl ar fin eus aneze,
A scòe em c'halon evel lanç pe gleze.

Me meus bet an amzer, ia ne zeus get pell,
Ma velen em jardin fleurjou caër o sevel;
Er fin, me zo trompet em oll bretantion,
Ne meus nemet picou da bica va c'halon.

Ar c'hoezec a here eo tremenet ar bloa
E rancontris eun den pa voan o studia,
Pehini am pedas da vont d'en asista
Betec eur plac citet vit va zantisa.

Pa voemp êru er plac pini voa assinet,
Eur femelen yaouanc e deus va decevet,
Hac e rentas eno va c'halon languissant
Gante zellou mignon hac e c'homzou charmant.

Va zaludi eure gant güir humilite:
Piou oc'h-u, den yaouanc, nac eus a bez contre?
Ha me respont dezi ebars en eur guer bêt:
An nep en deus dezir da vont ho servicher.

Excusit, den yaouanc, eus ar vadelez-se,
Rac ne veritàn get certain an enor-ze;
Mes pa rit din' enor d'er bea annoncet.
Bez et grêt em andret evel a leveret.

Azeit, plac'h yaouanc, celu'r scabelaze,
Vit ma clêvin ganêc'h eun darn eus ho toare.
Me garfe, plac'h yaouanc, e larsac'h din bremàn
Ha me a zo d'ho crad, evel m'en deziràn.

Eleal, den yaouanc, me a ell lavaret,
Abaoue ar moment ma meus bet ho qüelet,
E zoc'h sur an objet hêves va fantazi,
Ne zeziràn netra nem t' vec'h fidel din.

Arça ta, plac'h yaouanc, me a guemer cònje,
Eus ho pedi da chom bars er zantimant-ze.
Bet din-me carante evel ma zeo dleet,
Ha m'ho caro ive gant enor ha respet.

Bet persuadet mad eo güir va freposiou,
Ne gredit qet an dud gant o goal deodadou;
Hac evit prouvi dêc'h en ho caràn parfet,
Ho pedàn da retorn ha genta ma elfet.

Me ya joaüs eur vech bete ty va mestrez,
Tenzor eus a sqient, rouanez a furnez;
Hi eo sur va frinces, hac e deus carante
Evit he zervicher dre güir sincerite.

Bonjour dêc'h va mestrez rouanez ar merc'het,
Ho saludi a ràn gant enor ha respet,
Dre ma zoc'h eun objet hervez va fantazi,
Eur rozen qer brilliant evel ar fleur de ly.

Hadêc'h pareillamant den prudent haden fur;
P'o qüelàn o tonet, e meus calz plijadur.
Clêvet e meus aboue e voac'h eun den savant,
Mes bremàn ho credàn p'o clêvàn o parlant.

Me garfe, va mestrez, nac e lavarfec'h din
Ha me a zo d'ho crad ive d'ho fantazi,
Ia, va servicher, c'houi a garàn parfet
Dreist qement den yaouanc a zo sur var ar bed.

Ma ouffen, va mestrez, e ve güir qementse,
E ven sur an objet demeus ho carante,

Me ho recompansfe demeus a guementse,
Hac e vemp unisset dre ar c'hraç a Zoue.

Eleal, va zervicher, mad ec'h ellit credi,
Me rofe va bue evit caout hoc'h hini;
Credit, va zervicher, ia, pa en touàn,
Pa gafen mab eur princ, biqen d'ec'h ne vancàn.

Va speret zo troublet pa zòñjan, va mestrez,
Hac a ra dìn credi e zoc'h godisserez ;
Mes ne gredfen biqen e vec'h capabl da ze,
Hervez ma tislêryit amàn ho carante.

Mes donet a ràñ c'hoas da laqat va speret
Hervez va fantazi da garet eun objet
Pehini marteze a-rañ dìn mil hirvoud ;
Va bue, va maro a zoen he galloud.

Bet persuadet mat eo güir a lavaràn ;
Güell ve ganén mervel eguet ho trahissa ;
Mat ec'h ellit beza en assuranç var ze ;
Me varvfe evidoc'h, hac em be mil bue.

Pa zellàn eus an eol o commañ izellât,
Erueo an amzer ma zê pœent ho qüittât.,
Ne meus qeus da netra nemet n'allàn lezel
Va c'halon evit têt d'am c'harante fidel.

Eus agreiz va c'halon, den yaouanc, me hoped
Da retorn adare ha genta ma elfet ;
Hir e cav'in amzer hep clêvet ho toare,
Qen am bo ar boneur d'ho qüelet adare.

Me ya c'hoas eur veach da dy va c'harante,
Evit clêvet ganti eur vech c'hoas he doare,
Dre m'e deus ranfermet va c'halon er prison,
Dree zellou charmant hac he c'homzou mignon,

Bonjour dèc'h va mestrez, rouanez va c'halon.
Oll studi va sqiant, va c'honsolation ;
C'houi eo dra certen muia tra a garàn
A guement zo crouet gant Doue er bed-màn.

Me rent dèc'h ar zalud ive, va zervicher ;
Aboue meus ho quëlet e zeus calz a amzer ;
Dislavarat a ràn ar p'ez meus lavaret,
Dre eur gonclusion a zô deut em speret.

Va speret ha va c'horfzo en em gonsultet,
Hac en difin va sònj e meus bet remerget
Penos ne voan qet grêt evit an dimezi,
Hac abalamour dèc'h e meus calz a anui.

Qemerit va mestrez, eul lanç pe eur c'hleze
Da dreuzi va c'halon, m'ho pezo va bue,
Ha ne lavarit qet eur gomz evel hounnes,
Goude ho peza grêt em c'halon rouanez.

Mes c'houi leun a sqient hac ive a brudanç,
A ello el lèc'h all poursu ervad ho chanç ;
Bet persuadet mat ma vijen destinet
Da gavet servicher, em bije ho choazet.

Honnes ar bromessa ho poa-ta din-me grêt
Divea m'am boa bet an enor d'ho quëlet ?
An ên hac an douar zo test ar güir Doue :
Me ho lèz da juji demeus ar virione.

Evel eun ouades a ve' creiz ar môr bras,
On beuzet em daëlou, o sònj al em disgraç ,
O velet an dissign demeus va flañeden ,
Chanchet demeus a roz ebars en eur spernen.

Qent eguet achui, e meus c'hoant lavaret
Eun daou pe eun tri guer en profit ar voaset,

Dre ma meus càñolet ebars en peb qartier ,
Ze' ra din lavarat an dra-ze a zo sclêr.

M'ho ped, potret yaouanc pere a rên er bed,
Ne fiit birviquen en preposiou merc'het :
Ar bromessaou caër a nij evel ar pell ,
Pa zônjer nebeuta a ya gant an avel.

Guëlet a rit amân dre pezh seurt promesse
On me bet decevet gant ar femelen-ze :
Coulz ha me, yaouanqis, c'houi ell beatrompet ;
En padma oc'h abret, me ho ped dioüallet.

N'en em fiit qet re var ho tescadurez,
Balamour oc'h den brao ha carguet a farnez ;
Me amboa deus an eil ha demeus eguile ,
Hac a zo bet tromplet o re fiout enne.

Dre mavoan yaouanqic, allas! ne vouien qet
Ar fêçon da zisput gant godisserezet :
Gantozellou charmanthac oc'homzouqendouq
E laqont eur galon da vea amoureux.

Rac-se, potret yaouanc, teulit eves ounte
Me ho ped da gredi gant peb seurt güirione :
Eur plac'h, mar dê pennscân, a rayo ho maleur,
Mes, mar dê coant ha fur e rayo ho poneur.

CHANSON NEVEZ,

Var sujet eur Bassajerez hac eun den yaouanq.

Var eun ton nevez.

Pelec'h it u, passajerez, gant ho paguic vian ,
D'en em risca var ar môr evelse oc'h-unan?
Ho pisach hac ho qenet zo qer caër, qer brillant

Evel an eol beniguet a zo er firmamant.

Ha rac-se ta, Izabel, va douç, va c'harante,
Va ambarqit en ho pag, ma zîn ganêc'h ive;
Va brassa contantamant ha va flijadurez
Eo naviga ganêc'h-u var ar môr assambles.

Petra ê ar c'homzou-ze oc'h eus lavaret din?
A ya bete va c'halon hac a ra anvi din?
C'houi marteze a zo deut evit va godissa,
Pe evit clasq ar fêçon da ellout vazrompla.

Me zoeur plac'hic yaouanc oajet a bemzecvla,
Hac a meus calz da zioüal n'arufe din netra,
Rac calz demeus ablac'het a meus güelet trompet
O tonet da re fiout en comzou ar voaset.

C'houi ê certain ar fleuren eus an neve amzer
Ablijsur d'an dud yaouanc amân dre arc'hartier;
Mes m'amb-me ar boneur da vea d'ho fantazi,
Me en em gafe eürus certain dreist pepini.

Me a zo eun den yaouanc a gar bea secret,
Ne get bet biscoas em sônj da c'hodissa merched;
M'ellân antren en ho craç hac en ho carante,
Me ho caro, va mestrez, gant peb fidelite.

An nep a deu re vuan da gredi d'ar voaset,
Lies plac'h a zo trompet siouas eus o c'hlêvet!
N'en dê get avoalc'h caret bea anaveet,
Rac ar voaset zo trompus alies d'ar merc'hed.

Eur plac'h a goll he enor zo atao maleürus;
Offanci a ra Doue, collet eo he vertus;
Mes diveat voar goude da zonet da vouela:
An enor, pa ve collet, n'eller mui da brena.

Ne get vit coll hoc'h enornac ho virjinite

E meus-me sur, plac'h yaouanc, qemeret liberte
Da zont dac'houlen ouzoc'h ac'houi vije contant
Da zonet d'am ambarqi ebars ho patimant.

Marit din-me an enor da zont em batimant,
Var ben nebeut a amzer ni vo hon daou contant;
Ni labouron nôs ha de qen a vezimp rentet
Barser plaçva mestrezic oc'h eus dessign monet.

Avancit-ta, den yaouanc, hardi em batimant,
Rac demeus ho prepoziou en em gavàn contant;
Ho talant hac ho fêçon hac ho comzou charmant
A laqa em c'halonic calz a gontantamant.

Benigomp-ta an instant eus hon ambarcamant:
Me ho car, va zervicher, ganteur galon ardent,
Hac am bezo evidoc'h pepseurt fidelite,
Birvigen dêc'h ne vancàn qeit ma vîn en bue,

Eleal, va mestrezic, n'oc'h eus netracollet;
Me ho caro ive sur gant enor ha respet,
Hac am bezo evidoc'h ar memes carante
A oufec'h caout evidon bete fin va bue.

Va mestrez qer, preparomp en treomp-ni afo
Da gomanci da renviat entrezec hac hor bro
Hac eno, pavimp rentet, e vezimp assuret,
Racar môra zo traitour; fiout ennàn n'aller qet.

Rac-se eta tud yaouanc, qent eguet finissa,
Deut eta d'en em garout velma rê an daou-mâ,
Hac ho pezo plijadur an eil gant eguile,
Mar bevit mad assambles dre eur güir garante.

FIN.

E Montroulez, et ty LÉDAN, rue Pont-an-Itron-Varia.